

Le Riguer Guillaume (Plouguernevel 1852 – Kergrist-Moelou 1928)

Beleg

Turzunel Kerne

(Modernnaet eo bet an doare-skriva)

Klemmgan Plugernevel (bet embannet e 1909)

KLEMMGAN SEMINER PLOUGERNEVEL

Du-hont, e Kerne, me a wel,
Dispak gantañ e ziouskell,
Eun êl ‘uz da Blougerneve’
En e zorn dehou eur hleze.

Me a wel du-hont en amzer
A-uz toenn ar Seminer
Eun êl, konnar ‘n e zaoulagad,
En e zorn eur hleze ruz-gwad. !

Gwechall ‘uz d’an ti benniget
‘Med kano na ree an êled,
Darn gand ar bedenn o pignad ;
Darn o tiskenn gand o mennad.

‘Med kano ne ree an êled
‘Tre ‘n neñv hag an Ti benniget...
Kemm ‘zo etre deh hag hirie ;
Petra eta ‘zo a-neve’ ?

Eun êl hepken ‘uz d’ar Hloerdi,
En e zorn gwalenn ar gast’ !...
Petra a-nevez ‘zo degouezet
Pa ne gan pelloh an êled ?

Allaz ! Kerne a zo kañvou ;
Dre-oll ‘klemm hag huanadou !
Evid ar vro pebez diouer,
Serret, siwaz, he Seminer !

Ar Chaloni ‘oa en e benn
Taolet er-mêz ‘vel eun estren,
Stlejet er porz e veleien
Ha stlabezet e skolêrien.

Didronet ar Mestr, tud fallagr
O-deus rabet¹ war an Ti sakr !...
Mez daoust d’ar pezh ‘zo war baper,
D’an Iliz e’ ar Seminer.

Ya, Doue ‘zo c’hoaz e berhenn,

¹ rabet : ?

E êl a zo ouz hen divenn ;
Lagad ma feiz hen gwel en êr
A)uz toenn ar Seminer ;

Du-hont er hoabrenn me hen gwel
Dispak gantañ e ziouskell,
Hag en konnar e zaoulagad,
En e zorn eur hleze ruz-gwad.

1

Aze, etre an daou vene'
(Menez Du ha Menez Arre),
Etre kêr Rostren ha Gouareg
War-dro hanter-hent, el lanneg,

Aze, war horre ar grehenn,
'Vel pa vije he hurunenn,
Ken kaer hag ar haerrañ maner
Ema savet ar Seminer.

Picot, Person Plougerneve',
'N-oa hen savet gand e zanve',
'Vid ma vije 'hed an amzer
Tra an Iliz, tra on Zalver ;

'Vid ma vije ti ar bedenn,
Ti ar furnez, ar sklêrijenn,
Da zevel ar feiz rik ha c'hwek
Ha beleien 'vid he frezeg.

Greet en-deus an dra didamall,
Lakaet ar vad e-leh ar fall,
Savet da Gerne he enor
'Uz da oll vroïou an Arvor.

Mar na oa gwechall 'vid zeien²
'Med ar brug hag al lann melen,
Bremañ en-dro dezañ 'zo koajou,
Parkou leun a ed ha prajou,

Parkou leun a ed, prajou glaz,
Koajou bodenneg ha gwez braz :
Dre bedi ha dre labourad
Deuz al lanneg 'n-eus greet eur prad.

Koulz a zo bet o ! Bro-Gerne,
E oa truezuz ho toare :
Pa dregerne ar saonennou
Noz-deiz gand trouz an dizurzou.

² zeien : ?

Moueziou a oa klevet
Ha taoliou garo a oa greet...
Ar *fallagriez* a rene
Er zaonenn 'vel war ar mene' !

E-leh ne oa komz a Zoue
'Med d'hen dizakro a vije,
Deuz an eil menez d'egile
'Klever bremañ eur han neve' :

D'an nevez-amzer, o tiston,
E klever kan ar Basion...
Gizou ha komzou ar zabat
'N-eus dilezet ar Hernevad.

Pa daol en amzer, da zerr-noz,
E ganaouenn ouz troad ar roz,
D'al loar, d'ar stered evid test,
E ganaouenn drant 'zo onest.

Doue e Kerne 'zo karet,
Ar zakramantchou 'zo pleustret,
Ha mond a reer da bardona
Da Lourdd ha da Zantez-Anna.

Na piv en-deus greet ar burzud
En-deus troet buhez ho tud,
Kerneviz ? – N'e' ket eur mister :
Greet e' bet gand ho Seminer.

Bennoz Doue 'oa gand an Ti,
Ha bennoz ar Werhez Vari ;
Ouspenn, kalon an Tad Maner
'Oa bepred gand ar Seminer.

Beleien zantel deuz ar penn,
An dibab deuz ar veleien,
Beleien zantel desket kaer,
A ree ar skol er Seminer.

Greet en-deus e garg didamall,
Lakaet ar vad e-leh ar fall,
Savet da Gerne he enor
'Uz da oll vroioù an Arvor.

Al labour a ra he enor,
Hag a zo ho prasañ teñzor,
Kerne : greet o-deus beleien
Da ren ho tud ha d'o helenn.

Savet o-deus deoh beleien,
Hag ivez eskibien.
Nag a vanah, a visioner,
Kelennet gand ar Seminer !

Na ped ha ped a visioner,
Tommet o feiz er Seminer,
O-deus hi haset da bell-bro
Hag ano Kerne war eun dro.

Tudjantil vraz ha bourhizien,
Tud a vrezel, tud a lezenn,
Tud a vadou, tud a vicher
'Zo bet desket er Seminer.

D'ober vad d'an oll 'oa savet,
D'an oll ar vad en-deus rannet :
Ken kaer ha ken kaer e wele
War beb ene siell Doue.

Ar micherour an izellañ,
Aotrou ar hargou uhellañ,
Mab an ti-plouz, mab ar maner
'Oa keit ha keit er Seminer.

Hag a-bell, a-dost, deuz Kerne
Ha deuz an diavêz ive',
E terede ar vugale
Da Zeminer Plougerneve'.

Amzeriou kaer en-deus treuzet,
Deuz amzer fall en-deus reuzet :
Koulz hag er peuh, er gwall-amzer
Dispont en-deus greet e zevel.

E-kreiz e vrud e oa bremañ
Hag en e vleun deuz ar haerrañ,
Ouz hen ren en ano Doue
Eur beleg a Blougerneve'.

Ar gwel deuz an Ti-ze 'ree vad
D'ar galon ha d'an daoulagad,
An Ti a ree d'ar feiz er vro
Nerz ha sklêrijenn war eun dro.

Aze, war horre et grehenn,
'Vel pa vije he hurunenn,
Ken kaer hag ar haerrañ ùaner
Ema savet ar Seminer.

‘Vel eur skwer hag eun divenner
‘Ma ‘uz d’ar vro ar Seminer,
Ha Kerneviz ‘oa stad enne
Gand skol-vraz Plougerneve’.

Hirie Kerne ‘zo en kañvou,
Dre oll klemm hag huanadou !...
Evid ar vro, pebez diouer :
Serret, siwaz, he Seminer !

II

Er bloavez c’hweh ha naonteg kant
(Bloavez a reuz hag a zemant),
An naontegved a viz Kerzu
Eun darvoud garo a zo arru !...

Ne oa ket c’hoaz tarzet an de’,
Ouz toull an nor ‘oa aotrune’,
Tro-zro soudarded, jañdarmed !...
Ar Seminer a zo gronnet !

Soudarded ha soudarded c’hoaz,
Jañdarmed gand o hleze noaz,
War droad, war varh, o vond gand herr
Da ziroda ar Seminer !

Ar hloh klemmuz deuz lein tour
A harme o houlenn sikour.
E vouez a oa leun a druez
Hag a grie : forz ma buhez !

Re a barroz a zizrevel
Klemmou o breur, hag an avel
O vond gand saozennou Kerne
A grie : forz, forz ma buhe’ !

Hanter-dihun ha strafuillet
An dud, prim ha prim, a zered...
En eur weloud ar zoudarded
Fiziañs an oll a zo kroget :

Kalon ar mammou a dommas,
Breudeur, mignoned, a dridas,
Ha kenkent e teuas gante
O ! en eur vouez : *Vive l’armée !*

Gwir e’, ar zoudarded gwechall
‘Oa o harg miroud ha diwall,

Diwall ar vro ouz an dud fall...
Mez bremañ reont eur vicher all !

Hirie 'n o dorn a zo eun horz ;
Hag a tarhont gand dor ar porz,
Hag e tarhont war an nor-dal
'Vel da laha eul loen brutal !

Pep taol dre ar Bourk a ziston,
Ha pep taol ivez a sko don
E kalon an dud glaharet
War leurenn ar Bourh dastumet.

Kenkent setu eur griadenn
O skiltra ouz kreiz eur vandenn...
Eun den 'zo kouezet d'an douar
Maro gand ar spont, ar glahar !

Kalon an oll a zo mantret,
Daerou an oll o-deus redet...
Mez an taoliou bepred a gouez,
A zon war an nor hep paouez !

Prestig an nor a zo draillet,
Dindan an taoliou pulluhet...
Ar jañdarmed a ya gand herr,
'Vel er brezel,er Seminer.

Na ped ha ped a zo aneze,
Klezeier, fuzuillou gante,
'Eneb eun dousenn veleien
En o dorn eul Levr hepken,

'N o dorn Levr o fedennou,
O chapeled 'n o godellou,
En o halon ar garantez,
'N o genou komz ar wirionez.

Mouez ar bobl a zav 'vel ar mor
Pa zihlann war aojou Arvor,
Hag a lar gand eur griadenn
He spont, he heuz hag he anken.

D'he dro an nor vraz 'zo kouezet
Gand ar bizier-houarn divarhet,
Pe brevet gand an horz ponner !...
Setu digor ar Seminer !

Ne glever ekn 'med an taoliou
O vruzuna an norojou...

‘Vel pa vije er Seminer
Eun daou pe dri-hant amunuzer.

‘Vel pa vije er Seminer
Eun daou pe dri-hant amunuzer,
Pres gante d’ober archedo’
Da zebelia korvou maro !

E-keit-se “sous-préfet“ Gwengamp
A zav euz ar gegin d’ar gamb’,
A ya, a zeu, en eur gaketal,
A-hed an Ti en eur vragal.

Mouez ar bobl a zav a-bouez-penn
Hag a lar en eur griadenn :
« N’eo ket leal al lezenn
A lemm deuz e di e berhenn. »

... Setu o tond ar Superior
Dre henou an nor-vraz digor,
O tond etre ar jañdarmed
‘Vel pa ‘-ije greet eun torfed.

An dud vad a zo estlammet,
Gouela ‘ra kalz a zoudarded...
Ar bobl, dre zoujañs, pa dremen,
A zizolo, a bleg he fenn.

Trouz ebed ken ne vez klevet...
Mez daerou an oll, puill a red.
Pa zell³ ouz an Ti da gas dezañ
He himiad.. an diwezañ !

Eviti he oll veleien,
Stlejet evel torfetourien,
Hag an eil war-lerh egile,
Gand jañdarmed ouz o hoste’...

Mouez ar bobl a zav ‘vel ar mor
Pa zihlann war aojou Arvor :
« N’eo ket leal al lezenn
A lemm deuz e di e berhenn. »

Jezuz, hag en-deus lavaret :
« E leh e vin, me ‘rank kaved
D’am zervija ma beleien,
Ha d’am fedi am hristenien. »

N’halle pelloh chom e-unan

³ Pa zell : Pa zell ar bobl...

Heb goulou, heb ezañs, hep tan,
Hag eur galon d'hen adori
Ha da domma ouz e hini.

N'halle ket pelloh on Zalver
Chom en Ti heb e zervijer...
War-lerh an eil mestr ar Mestr Braz
D'e di, keno, a lavaras !

E Di !... Ya, e Di da viken,
Daoust da gomzou ha da lezenn ;
Eñ a zo e berhenn bepred,
Er-mêz nag e vez bet taolet.

E-kichenn, en iliz-parroz,
Ema 'vel en eur Baradoz :
Tad kaloneg d'hen adori,
Tud a feiz vad d'hen *hoñsoli*.

Eno tud vad Plougerneve'
A viro, war-bouez o buhez ;
Karantez leal ha tener
Evid Jezuz ar Seminer.

Setu greet eta an torfed !
Ar Seminer 'zo dizakret !!
Ha setu Kerne en kañvou !!!
Doue da gleved he hlemmou.

III

Gwechall, Kerne, Breiz-Izel,
C'hwi a dalhe eur reñk uhel,
Ha kaerrañ lufr ha kurunenn
A oa dreist o feiz kristen.

Neb a oa ho feiz adsavet,
Deuz a beb reuz he diwallet
Hag he miret ken kreñv 'n ho pro,
Mammenn ho feiz a zo maro !

War ho touar, Plougerneve',
'Oa diwanet boket Kerne ;
Ha marteze n'hen goareh ket,
C'hwi e' a zouge ar boket.

Ne zoñjeh ket pebez enor
Az-poa dirag pobl an Arvor...
Mar oe brudet Plougerneve'
E' dre e Seminer e oe.

Joa vraz 'oa 'n ho tiegeziou
Pa zegoueze deiz ar Prijou,
D'ar meurz ha d'ar yaou zoken
P'arrue tud ar skolerien.

Pa dremene ar vugale
Dre ho Pourk, o vond da vale,
Oute ho kalon a dride
Evel pa vijent bet ho re.

Didrouz ha trist 'pad an hañv braz,
Er Bourk e teue buhez c'hoaz
Pa zeue gand miz ar Rozer
Ar vuhez 'barz er Seminer.

Vad a ree kleved, d'ar mare,
Son an *trompillou* adarre,
Mesket gand mouez ar skolerien
O vond gand avel ar zaonenn.

Ha c'hwi, Boukiz Plougerneve',
Aze, didorr, c'hwi a veve ;
Bara hag arhant an ho ti,
Ya, c'hwi a veve dizourisi.

Ya, en diskeud ho Seminer
Ho puhez 'oa skañv ha seder.
Mez pelloh ne vo ket heñvel :
Troket eo bugel er havell !

Gand e ren hoh eurvad 'zo kouezet !...
Doue eul liamm en-doa skoulmet
'Tre ho puhez hag e vuhe',
'Vel 'tre ar horv hag an ene.

Ne oarer ket, 'vid ar yehed,
Petra 'dalv, ken na ve kollet ;
N'anavezer ket ment eur wezenn
Ken na vez kouezet war an dachenn.

C'hwi hag a oa en dienez,
Kleñvourien ha paourien ger,
Ho lod e peb amzer
E oll brejou ar Seminer.

M'ho kwel bodet en-dro d'an nor
Gand hast o hortoz an digor.
Daoust d'an amzer, heol, glao pe skorn,
Ho pod-pri a bign ouz ho torn.

Pelloh ken na pred na diner
Da glask ouz dor ar Seminer !...
Gouelet, o ! paourien gêz ma bro,
An dorn ho mage 'zo maro !...

Kerne 'zo bremañ en kañvou,
Dre-oll klemm hag huanadou !
Evid ar vro pebez diouer,
Serret, siwaz, he Seminer !!

IV

'N e zav, dilavar en avel,
Ouz eur horv maro e' heñvel...
Hen gweled a zo eun drue',
Hen selled a sklas an ene !

Ne zered ken a Vro-Wened
Nag a Vro-Gerne kennebeud,
A Vro-Hall nag a Vro-Dreger
Ar Vugale d'ar seminer !

Ne zered ken war-zu an Ti
'Med tud heñvel ouz ar brini
Pa wahont a-leiz o geno'
O klask lod deuz eur horv maro.

Ne dosta nemed an dud kri'
Ne reont forz e peleh kregi,
Nag a zispenn ar Seminer
'Vel ar Judev sae on Zalver.

Daou berhenn koz 'zo en dachenn
'Vid degemer ar skraberien :
'N hini 'zavas an Ti kentañ,
An hini 'reas an diwezañ.

Dom Picot, e penn ar hlazenn,
En e zav-sonn war e zichenn,
Dirag sant Charl hag ar Werhez,
War dal an ti gand sant Frañsez ;

Dom Picot, e penn ar hlazenn,
En e zav-sonn war e zichenn ;
Hag er chapel an Aotrou Graet,
E benn er-mêz deuz e arched...
Gwechall eur yhed a veze
Gwelet en Ti leun a vuhe',
En-dro dezañ ar gwez, bleun a hwez-vad...

Ha bremañ, pebez kalonad !

Avel Kerne o tarnijal
A yud, a ouel er chiminal ;
A ouel, heb damant, heb dihan,
E beg ar chiminal hep tan.

Lapoused an deñvalijenn,
'Leh Doktored ar sklêrijenn !...
A-hed an noz kouhan⁴ ha toud
A hop, a hop hag a hirvoud.

Du-hont da greh emaint kludet...
Diwar stern eur werenn dorret,
Truezuz evel eur hlemmgan
E tiston dre an noz o han ;

Truezuz 'vel eur glemmadenn
E tiston en deñvalijenn,
E tsiton war ar Bourk didrouz
'Vel mouez an Anaon o hourdrouz !

'Vel mouez an Anaon o hourdrouz
E tiston war ar Bourk didrouz,
E tsiton war ar vro a-bez
'Vel mouez ar glahar hag ar vez !

Lapoused an deñvalijenn
'Leh Doktored ar sklêrijenn,
Pebez dizurz, pebez enkreiz !
Taolet ar gwir berhenn er-mêz !...

Kaer e oa gand e zae hlazour⁵ !
Enni 'vel en eur melezour.
An heol o sevel a zelle
Maroa koant, deuz ar beure.

Na kaer e oa pa lugerne
Dindan bannou an heol kreizteiz...
'Vel lagad Doue 'uz d'e benn
O rei dezañ **NERZ HASKLERIJENN !**

Kaer 'oa c'hoaz d'an abardae'
An heol a-raog kloza an de'
A hoante re dezañ, kent kuitaad,
E sklêder gand pok an noz-vad.

Kaer mouez ar hloh, striz d'e zever,

⁴ kouhan : ?

⁵ e zae hlazour : ?

A zoen skiltr beb eun amzer,
Didruez 'vel mouez al lezenn,
Da gas mestrou ha skolerien.

Kaer 'oa da weled 'pad an de' :
Dre ar porziou e vugale
Yah ha joaüz oh ebati
'Tre koulz pedenn ha koulz studi.

Kaer e oa ivez 'pad an noz,
Sioul ha dizaon war e roz,
Paket en e vantell-vrumenn,
'Tre e zivreh e skolerien.

Ken kaer hag ar haerrañ maner
'Oa da Gerne he Seminer !
Dibod eun Ti ken karadeg,
Dibod bro ken anaoudeg.

Dibod eun Ti ken karadeg,
Dibod bro ken anaoudeg ;
Dibod Ti zo kement karet
Gand ar vugale 'n-eus savet.

Pa zoñjer pezh en-deus koustet
A arhant hag a boan-spered !...
Dibod ar hristen e Kerne
N'en-deus min⁶ e Plougerneve'.

Pa zoñjer pezh en-deus koustet
A garantez hag a aket !...
Dibod ar hristen e Kerne
Ha na gar e Blougerneve'.

Gwechall eur yehed a veze
Gwelet an Ti leun a vuhe',
En-dro dezañ gwez, bleun a hwez-vad...
Ha bremañ, pebez kalonad !

Yeot hir war ar gwenojennou,
Drez, linad e-leh ar bleuniou,
C'hwez ar hoz, dorojou tarzet...
Setu stad an Ti dilezet !

War e goajou, e zouarou,
'Zo evel eur vantell a gañvou,
Hag El ar Gwir a-uz d'an Ti
A led ar spont, ar velkoni.

⁶ min : mên (?)

Lagad ma feiz hen gwel en êr
A-uz mên ar Seminer,
Hag eñ konnar 'n e zaoulagad,
En e zorn eur hleze ruz-gwad.

Ar re-ze 'zo frouez divennet,
Madou gand o mestr diframmet ;
Poan 'ra d'ar galon p'o gweler,
'Vel, pa ne vijent ken, ken kaer !

Poan 'ra d'al lagad o zelled,
Madou gand o mestr diframmet...
Mez Doue 'zo c'hoaz o ferhenn
Hag a vo,daoust da beb lezenn.

Kaer a vo klask digareziou,
'Livo lezenn ha lezennou :
Kement ha laha an nesañ
E' lemel e wir digantañ.

Ma n'e' ket leal al lezenn
A lemm e dra gand e berhenn ;
Al lezenn-ze he-deus eur si
A zo anvet al laeroñsi.

Ar chapel, gwechall ken laouen
Gand trouz ar han pe ar bedenn,
Serret !... N'eus ket enni eur vrud,
Hag he hloh en tour a zo mud !

Jezuz en-bev n'e' ken enni
Dindan skeudenn vên an osti,
Na diwar he zron ar Werhez
O vousec'hoarzin gand madelez !

War he breh azezet, he Mab
Gand e viz a ree e zibab,
Hag en he skouarn dezi a lare :
« Hemañ 'vo eur Jezuz ive' . »

Serret, ar chapel venniget
Am-oa, bugel, enni pedet !...
Jezuz enni ne ziskoy⁷ ken
D'e Vamm e zanvez beleien !...
Eur vamm, nag hi 've evuruz
Pa vag eur mab evid Jezuz !...
Mamm baour, c'hwi a ouelo doureg,
Biken ho mab na vo beleg !

⁷ ziskoy : ziskouezo.

Daoust d'ho c'hoant ha daoust d'hoh anken,
Ho mab ne vo beleg biken !
Ne zavo ken beleg er vro :
Ar Vagerez a zo maro !

N'e' ken ar stal 'vel diagent,
Maro e' ar Vagerez sent !...
Gouelet, Kerne, gouelet, ma bro,
Mammenn ho feiz a zo maro !!

Pa vo goueliou on Fatroned,
Ar *muzik* pelloh ne zeuy ket...
Na Superior Plougerneve'
Da gaerraad Pardonioù Kerne !

Kaer a oa, da viz ar bleuniou,
Gweled o tond a-vandennou
Deuz a bep tu AR RE GOSANÑ
Ken skañv hag AR LAOUENKANÑ

Dond a reent d'enori an Ti
O-doa greet ennañ o studi,
Dond a reent da freskad o gwad
En Ti a oa 'vel ti o zad.

Dond a reent oll d'en em weled
Evel breudeur ha mignoned,
En Ti a zavas etreze
Chadenn baduz ar garante'.

Vad a ree deze neuze ouspenn
Gweled o Henañ en o fenn,
Hag her hleved o tisplego⁸
Oberou an Ti dre ar vro.

Keno... moarvad evid bepred,
Koz ha yaouank, on mignoned...
Goueliou na zeuint ken en-dro,
Deizioù evuruz, kenavo !...

V

Petra a glasker, Kerneviz ?
« Digristenna on henvroiz,
Ha 'vidma vo surroh an taol,
A zo⁹ diskaret c'hoaz div skol.

Nag a vamm vad, a vamm gristen,

⁸ tisplego : o tisplega.

⁹ a zo : tregerieg : ez eus.

Aozet e Gouareg, e Rostren,
O-deus savet o bugale
Ha miret e doujañs Doue.

Nag an êl enne dibabet
En-deus laret keno d'ar bed
Evid ober,dre garante',
Deuz klañvour pe deuz bugale ;

Deuz klañvour en ospitaliou,
Pe deuz bugale er skoliou,
Hag e lare ar Hernevad :
« D'ar horv, d'an ene, e reont vad. »

Serret Seminer ar baotred
Ha skoliou kristen ar merhed,
Me 'wel e vo c'hoaz hebdale,
Kerne, truezuz ho toare !

Me 'wel e vo c'hoaz hebdale,
Kerne, truezuz ho toare...
Bloavez hag Ored¹⁰ 'n o gwaziou
E-leh dour a ruillo daerou !

A ruillo daerou Kerneviz,
Daerou d'ar feiz, d'an onestiz :
An onestiz, ar feiz, maro
Dre ar pevar horn deuz ar vro.

Gouelet, Kerne, gouelet, ma bro,
Mammenn ho feiz a zo maro !...
Evid ar vro, pebez diouer,
Maro, siwaz, he Seminer !...

VI

Maro.... da viken na n'e' ket...
'Vel Jezuz deuz e vez savet,
Eun deiz da zond c'hoaz e savo
E benn uhel a-uz d'ar vro.

C'hoaz e krogo, 'vel diagent,
Ar Seminer da heuill e hent
Evid enor ha mad ar vro,
Evel e klaske Dom Picot.

Pegeid e pado an tri de'
Ma vo on Seminer er bez ?...
Daoust hag-eñ a chomo !... heñvel

¹⁰ Ored : ?

Ouz *Bon-Repoz*, releg santel ?...

Pa oa dirollet ar Reuz-Vraz,
War Gerne ivez e skoas ;
Hag hep truez ar Seminer
A oe sammet gand eur prener.

El an Ti 'oa ouz hen divenn.
Setu perag, ar paour-kêz den,
An aour a baeas e varhad
A oa bet ruzet gand e wad.

An êl a ros e gleze
Evid kastia ar pren-ze...
Abaoe ar gwad a zo chomet
War gleze an êl konnaret.

Doue a zo *just*, ha Doue
'Gemeraz buhez 'vid buhe',
Rag : keit ha laho an nesañ
E lemel e wir digantañ !

Mar e semplet Plougerneve',
Mar n'hall ket 'n em zivenn hirie ;
Doue 'zo bepred e berhenn,
E êl a oar ouz hen divenn.

Lagad ma feiz der an amzer
Hen gwel a-uz d'ar Seminer,
Hag eñ konnar 'n e zaoulagad,
En e zorn e gleze ruz-gwad !

Eun deiz da zond c'hoaz e savo
E benn uhel a-uz d'ar vro...
Ha Kerne a ray goueliou kaer
Pa zigoro e Seminer.

.....

Da hortoz, ni, oll dud Kerne,
Da Superior Plougerneve'
Ni 'lar hag a lar a-nevez
On doujañs hag on harantez.

Evid e Seminer karet
Poaniou grevuz an eus euret¹¹ ...
Sanr Briak hen dihahlaro,
Jezuz en Neñv hen digollo.

¹¹ an eus euret ? (en-deus bet).

.....
Beajour mad, c’hwi a dremen
O vond deuz an eil kêr d’eben
Gand an hent praz pe ar harr-tan,
Ganah eur zalud a houlan,

Eur zalud d’an Ti dilezet,
Eur zoñj war ar pez ema bet...
Bremañ eur zeblant, ma n’e’ ken !
‘Vid ma vevo c’hoaz, eur bedenn.

Turzunell Kerne

Imprimatur

Brioci, die 22 februarii 1909, , Vic. gen.Y.-M. LE PENNEC

Notenn gand “Emgleo an Hirwaz“ : En amzer-ze e felle d’ar veleien beza mistri war ar bobl.
Eun ospital a zo bremañ e-leh ar Seminer.